

ne voa ket e ker peurlaret  
 an otrou Mesambre en ti zo entreet  
 Bonjour a joa er maner man  
 M<sup>is</sup> trezelan pelech e man

M<sup>is</sup> trez : ne ma ked er guer  
 e ma ed en eum tamik affer (bis  
 ken e vo var c'hoas ne teuio dar guer

na lavar dime pelec'h e man  
 va c'hoar vaguer zo deuet kantan

otrou mesambré neket mad din  
 diskleria an eb a ro bara din

na lavar dime pelech e man  
 pe me a lakei ta choad da ienan

an otrou M<sup>is</sup> treselan  
 a zo en e kamp huelan  
 e lec'h ne vo kavet gant netra

Nem moa ked alies te avertisset  
 divar ben ar guin ag ar merchet

ispicial divar ben ouman  
 a lakei ta hoad da ienan

Cri a viche ar galon na voelche  
 er jardin trezelan neb a viche

e vellet an tan en pevar c'horn an ti  
 ar M<sup>is</sup> o kreis e leski

voelet ar tan en pevar c'horn ar maner  
 ar markis e kreis da c'houlaou

nag(2) ar plac'h iaouank en en c'haross  
 da vont da enterri de faros

otrou a mesanbran en eur leter  
nag o touguen kaon de c'hoar vaguer

o welet ar plac'h noas e fen  
ag hi ouz ar baron o gouren

*(1) Il n'y a pas de titre dans le ms. Penguern.*

*(2) n de nag a été ajouté.*

*Les deux vers du f. 183 verso ne sont pas la suite du fol. 183 recto, mais peuvent appartenir à cette version, comme à une autre.*